

ISTORIOU

TENNET EUZ AR SKRITUR - SAKR

gat an Tad BERTHE, Redamptorist,

LAKEAT E BREZOUNEK GAT AN A. SANN,
PERSOUN BANNALEC.

EIL LEORIK :

ABRAHAM



BANNALEC,

23 a viz Here, Gouel hor Redamptor.

ISTORIOU

TENNET EUZ AR SKRITUR - SAKR

gat an Tad BERTHE, Redamptorist,

LAKEAT E BREZOUNEK GAT AN A. SANN,
PERSOUN BANNALEC.

EIL LEORIK :

ABRAHAM



BANNALEC,

23 a viz Here, Gouel hor Redamptor.

APPROBATION DE MGR LAMARCHE

ÉVÊQUE DE QUIMPER ET DE LÉON.

ÉVÊCHÉ
DE QUIMPER
ET DE LÉON

Quimper, le 25 mars 1892.
En la Fête de l'Annonciation
de la Sainte Vierge.

IMPRIMATUR.

CH. LELEUX, Vic. Cap.

Arras, 23 Avril 1892.

Cher Monsieur le Curé,

Les Récits Bibliques du R. P. Berthe, Rédemptoriste, obtiennent un grand et légitime succès. Ce sont des résumés substantiels et admirablement faits de l'Histoire de l'Ancien et du Nouveau Testament.

Vous avez eu la pensée et je vous en félicite, d'en faire bénéficier notre pays Breton qui y trouvera un complément très utile du beau livre *Testament Coz ha Testament Nevez*. Je ne puis donc que vous encourager grandement à poursuivre votre excellent travail de traduction, qui, pour une part très sérieuse, servira les intérêts de la Foi et de la Langue Bretonne dans notre pays.

Croyez, cher Monsieur le Curé, à mes sentiments d'affectueuse estime et d'entier dévouement.

THÉODORE, Évêque de Quimper et de Léon.



ABRAHAM

I.

GER DOUE.

DR c'hresteiz da Vabylon, var ribl an Euphrat hag an Tigr a zislounk ho dour, tost di, en eun aber hanvet Persik, e zeus eur vro euz ar re gaerra hag euz ar re binvidika. Kaldee oa guechall he hano. Pa oue kemmesket al langachou e Babel ha ma oue red d'an dud dispartia an eil rumm diouz egile, bugale Sem, ouen dud krenv ha speredek, a gavas mad an dachen-ze hag a deuas ennhî da jom. Uruk, ho roue kenta a zavas, anter-hent etre Babylon hag an Aber Persik, eur gear eb he far, var ribl an Euphrat. Rei a reas dezhi an hano a Ur-Kasdim, da lavaret eo, kear vraz ar C'haldeaned.

En amzeriou kenta-ze, Babylon, Niniv ha Memphis a ioa traou dister e kichen Ur-Kasdim. Ama, an tiez o doa mogeriou ledan ha stard, avechou peintet, el leac'h n'oa diagent nemed lochennoù raosk savet gat an tadou koz. Eur voger ag e doa eur c'hart-heur bale hag ouспен ugent troatad ledander a



SACRIFICE D'ABRAHAM

rea an dro da gear hag he dioualle ouz fallagriez he amezeien. Tro-ar-dro, e rede an Euphrat a dreuz ar meziou pinvidik ha gat he c'hanoliou bihan, a rea euz an douar-ze evel eur baradozik. Eno, peb tra a deu da vad, prajeier glaz, parkeier melen ha guiniaz alaouret; bokedou a c'huez vad ha guez palmez a zao ho fenn betek an Env.

An dud a ioa eno e chom, a ioa lod anezho labourerien douar; eul loden-all, hag ar re-ma a ioa stankoc'h, a ioa pastored hag a iea du-ma ha du-hont, da heul ho loened. Huelloc'h eget ar re-ma, edo an dud desket, an dud a studie doareoù ar Stered hag a rea kanaouennou nevez en enor an doueou-faoz —

Siouaz ! evel an holl boblou all deuet euz a Vabel, ar C'haldeaned ne zalejont ket da drei kein d'ar guir Doue, krouer an Env hag an douar, ha da zaoulina dirak traou krouet a velent gat ho daoulagad hag a douchent gat ho daouarn. Dallet gat an techou fall, an dud a droaz ho c'haloun varzu traou groz hag a reaz anezho Doueou. Darn a adore ar plant euz ho jardin; darn all, al loened euz ho c'hreier; ar re-ma a stoue dirak imachou koad, aour pe vein-marbr; ar re-ze a adore stered an oabl. Ar C'haldeaned, desket mad var doare ar stered, o devoa eun devosion vraz evit ar volz steredennet ha dreist-holl, evit al loar a ioa ker mad en ho c'henver, dre ma roe dezo eur sklérigen gaer ha douss evit ober ho studiou. Ar roue Uruk en doa savet eun iliz vraz da Rouanez an noz hag en doa lakeat ober he batrom he zivrec'h astennet gantha varzu an doue Sin, da lavaret eo, al loar.

Hogen, e touez bugale Sem deuet da jom er C'hal-

dee, e zoa, e kreiz an idolatred-se eur famill vad hag a anaveze an Actrou Doue, hag a ioa mignoun dezha. Pevar c'hant vloaz, pe vardro, goude an diluj, oa e penn ar famill-ze eun den hanvet Thare, a ziskenne euz a lignez Sem, en delc'hd rumm. Tri vap en doa : Aran a varvaz iaouank, hoaz hag a lezas var he lerc'h eur mab, hanvet Loth. An eil oa Nakor, ag a zimezas d'he nizez Melka merc'h da Aran. An trede a ioa he hano Abram, ag a zimezas da Sarai, a ioa ive nez dezha. Thare en dea torrajou loened, n'oa ket dioc'h kount, hag a veve e touez ar bastored. Abaoue pell amzer, edo tud Ur e c'hoapaad anezha abalamour d'he relijion, abalamour ne rea ket evelde ha ne adore ket ive al loar. Da genta, e talc'has mad; mez abalafin, touellet ha dallet gatho, hen hag he vab Nakor a fall-galounas. Adori a rejont an idolou, ne ket m'ho dije fizians enno, mez evit beza deuet mad ha plijoud d'ho c'henvroiz.

Abram, avad, ar iouanka euz a vugale Thare, a ziskouezas muioc'h a nerz-kaloun eget ar re-all. Mignoun da Jehovah mestr an Env hag an douar, ne falvezas dezha morse daoulina dirak traou krouet. An heol, al loar, ar stered-se a veler e bro ar C'haldee, dre an nozveziou kaer, ker stank ha ker koant e bolz an Env a zeske dezha muioc'h-mui, peger mad, peger gallouduz eo ar Guir Doue, pa z'e guir en deus tennet a netra burzudou ken dudiuz. Istor he dadou koz a dremene neuze dre he spered. Seblantout a rea dezha guelel an den kenta Adam kasset er meaz euz a varadoz an douar abalamour m'hen doa dizentet ouz Doue; guelel a rea he vugale beuzet en dour diluj abalamour d'ho

buez direiz, ha bugale Noe, d'ho zro, diskaret gat Doue abalamour d'ho ourgouill, abalamour m'ar felle dezho sevel eur gear hag eun tour e Babel evit ober fae varnha. Pa vel ar bopl e trei kein da Zoue, Abram a gren gat aoun na goesfe adarre var an dud reuziou nevez. Gouskoude fizians vraz en doa e komzou Doue ha pedi a rea anezha a greiz he galoun da zigass affo an Hini a dlle bruzuna he benn d'ar zarpant ha lakaat ar bed e c'harz treid he Grouer.

Eun deiz, m'edo e komz ouz Doue evel ouz eur mignoun, e klevas, en eun taol, eur vouez misteriel, mouez Jehovah o lavaret dezha :

« Abram, kit kuit euz ho pro. Lezit aze ho kerent ha ti ho tad ha kerzit varzu an douar a ziskouezin d'eoc'h. Me'lakai da zevel ac'hanoc'h eur bobl niveruz. Skuilla' rin puill va grassou varnoc'h, hag ho c'hano a vezo ken anavezet ma ne vezo biken ankounac'heat. Va bennoz a roin d'ar re ho pennigo ha va malloz a roin d'ar re ho mallozo. Ennoc'h e vezo benniget an holl boblou euz an douar. »

Abram a adoras Doue, ha raktal, evit senti outha, e pourchasas peb tra evit kimmiada. Doue a c'houlenne kalz digantha. Red oa dezha kuitaat tachennou druz ar C'haldee, eb gouzoud e pe du trei. Red oa dezha kuitaat he vro, he dud, eulloden zo-ken euz he zanvez. Rak ne c'helle ket kass d'he heul kement hen doa. Mez Doue en doa lavaret, hag Abram a zent var ar ger, eb marc'hata. N'hen devoue ket a leac'h da gaoud keuz. Rak, dioc'h-tu, Doue a roaz dezha he zigoll. A veac'h hen doa lavaret d'he gerent an urz en doa bet digat Doue, ma teu Thare, he dad, ha Loth, he niz, da ziskleria

dezha e zeint d'he heul, n'euz forz e pe leac'h e vezo merket dezha gat Doue en hem drei. — Nakor, zo-ken, daoust ma zoa eun nebeudik troet varzu ar falz doueou a fellas dezha ive mont da heul ar re-all.

Nebeud derveziou goudeze, keriz Ur, pa veljont ar re-ma e tiblass ker buhan, a jommas mantret. Goulen a reant an eil digat egile perak e tec'he ar pastor Abram euz eun dachen ken druz. Daoust, emint-hi, ag an Doue braz a adore Abram e-Hur, en deffe roet dezha da anaoud eur vro kaerroc'h ha pinvidikoc'h eget bro he dud koz?



II.

AR PERC'HIRIN.

ABRAM a iez varzu an anter-noz gat he dud hag he loened. Goude beza treiziet an Euphrat var bagou ha radilli, e tiouezont e kreiz ar peuri, var an tu deou d'ar ster. Dirazho edo meziou Sennaar. Eno oa bet e chomm da genta bugale Noe. Ne ellent mont nemet goustadik, kement-all a loened a ioa gatho, kanvaled hag oaned, ezen hag ejenned sammet a deltou hag a vevans. Da benn eun nebeud amzer e c'heruont gouskoude er Balylonii, var douarou Nemrod, ar chasseur braz, mab bihan Cham. Goude beza tremenet dirak Erek ha Chalanne, e veljont dirazo tour huel Babel, tour a seiz astaj, chommet eb beza perachuet evit diskuez d'an den pegen dister eo ha peger galloudek eo an Aotrou Doue. Babylon, ar gear-ze a dlïe beza ker brudet divezatoc'h. a zebantas disterik ha paour da dud Ur-Kasdim e skoaz da gear-veur ar C'haldee.

Tenna'reont atao euz a Vabylon varzu bro an Anter-noz. Diouezoud a reont e bro Assur, ar Mezopotamii, e kear Resen, brudet d'ar mare-ze hag araok ma teuas Niniv da veza prinsez ha burzud

broiou ar Sao-heol. Erfin, goude eur veaj a gant anter kant leo, Doue a roas urz dezho da jom a za e kear Haran. Treuz ha treuz oant eat d'ar Mezopotamii, euz an eil penn d'egile.

Kear Haran a ioa e kreiz eun dachen binvidik, a rede dre he c'hreiz eur c'houeriaden dour hanvet Bilikus hag a iea da ziskarga en Euphrat. Ac'hano da Orfa, kear-veur an Armenii, n'oa nemed eun dervez bale. An dud ac'hano, pastored evel Abram, nouent ket estounet evit gueled ar pastor divroadma e tont da zevel he delt en ho bro. En hem gaout a reant aliez assamez pa gassent ho loened da beuri. Hogen n'ho guelent morse en iliz ho doueou. Marvad, a lavarent, eun doue bennak a ne anavezomp ket a ro sikour dezho. Rak an torrajou anevaled a zigasse bemdez ar bastored d'ar ster a iea var gresk atao en eur fessoun burzuduz. — Abram ne felle ket dezha darempredi an dud-se n'ho doa nak ar memez relijion, ñak ar memez kreden nak ar memez doareou eveldo.

Epad ma chommas en Haran, Abram en devoue ar c'hlaç'har da goll he dad, Thare. Hema a varvas d'an oad a zaou-c'hant pemp bloaz, mignoun da Zoue he dadou koz.

A veac'h en doa Thare klozet he zaoulagad, ma klevas Abram adarre mouez an Aotrou Doue o lavaret dezha kuitaat bro Haran ha mont da fouetta bro. Pemzek vloaz ha tri-ugent en doa neuze. Perak eta tec'het euz ar vro ze evit mont ne c'houie ket da beleac'h? He vreur, Nakor, ne fell ket dezha mont pelloc'h hag a jomm gat he vugale e kichen bez he dad. Mez Abram, ne zavas ket zo-ken en he benn ar zonj da zizenti ouz Doue. Mont a ra en

hent gat Saraï, he bried, ha Loth, he niz. Kass a ra gantha he holl zanvez, he dorrarjou loened hag an holl dud a ioa deuet da greski he diegez abaoue m'edo en Haran. Holl assamez e kerzont, en taol-ma, etrezek ar c'huz-heol.

Goude seiz derveziad mad a vale a dreuz dezert Aram, e chomjont holl da ehana epad eun nebeud amzer e kear Damas, kear-veur ar vro-ze. Abram a reas eno anaoudegez gat Eliezer. Hema a deuas da veza he vella servicher hag he vrassa mignoun. Da benn eun nebeud derveziou, Abram a zantas he galoune tridal pa velas meziou kaer ar Jourden hag, en tu-all dezo, menezioù glaz Chanaaan. An dud a ioa eno neuze e chomm a ioa tud dizoue hag a vuez fall evel Cham, hozad koz. Ne rejont van evit gullet e tremen dre ho douarou an den divroed-se. Gouskoude bugale an den-ma a dlie divezatoc'h, a berz Doue, skei varnho ha var ho bugale taoliou pounner. Abram a gerzas bete kaloun ar vro, bete Sicheim. Eno oa rouez an dud neuze; ha kement a beuri a ioa tro-var-dro, ma c'hellaz kemeret eno eun ehan, eb ma oue lavaret ger dezha.


Eun deiz, e' pignaz var ar menez hag a c'hanò e vele holl bro Kanaan. Ker brao oa an daolen a ioa dispak dirak he zaoulagad ma zeas evel er meaz anezha he unan. E tu an anter-noz, menezioù Liban a zave ho c'hern en ear evelken aliez a jeant; e tu ar c'hresteiz, e tispake an dezert bete trañien an Nil. En dezert-se edo bugale all Cham mistri goude Doue. E tu ar Sao-heol, dreist ar Jourden hag ar menezioù a zo a uz d'ar Jourden, e vele a spered bord an Euphrat hag an Tigr. Eno edo e chomm ar Semited, he vreudeur. Ekostez ar C'huz-heol, var

ribl ar mor doun ha dreist kern ar menezioù, edo bugale Japhet, savet gatho kalz rouanteleziou. Abram en hem gave evel e kreiz ar bed, hag en dro dezha e vele skignet holl bugale Noe.

Souden, mouez an Aotrou Doue a gomzas adarre.

« Abram, eme an Aotrou, an douar a zo dindan ho treid, eo an douar a roin divezatoc'h d'ho puga-le. »

Ar patriarch santel a ioa erruet eta e penn he veaj. Stoui a reas dirak Doue evit he adori hag, el leac'h ma komzas outha an Aotrou Doue, e savas eun aoter evit diskuez he anaoudegez-vad. Eno, dirak he holl dud, e kinnigas eur sakrifik da Jehovah, ar guir Doue ! evit he drugarekaat da veza evel hen digasset dre an dourn beteg an douar ben-niget-se, el leac'h ma tliz beza ben-niget ive dreizha an holl boblou euz an douar.





III.

EN EJIPT.

ABRAM ne jommas ket pell e Sichem, diskenn a reas varzu broiou ar c'hresteiz hag e zeas var eun dachen, etre Bethel, e tu ar c'huz-heol ha keriaden Hai, e tu ar Sao-heol. An douar-ze en doa Doue sonj da rei d'he vugale. Mez brema n'oa eno nemed eun divroad hag a ia du-ma ha du-hont, dioc'h makave peuri mad evit he loened. Hogen, e peb leac'h, e mesk an dud-se a stoue dirak an idolou, Abram a zalc'he sonj euz an Aotrou Doue, he vestr, ha renta rea dezha bepred enor ha meuleudi. Eun aoter vean, savet var eur grec'hen, a ziskoueze da dud Bethel ha da dud Hai n'oa ket Doue Abram henvel ouz an idolou udur a stouent dirazho.

Doue gouskoude a zigassas d'he vignoun eur groaz pounner. A bouez mont araok ato, Abram a ioa erruet er penn pella euz douar Chanaan, pa zavas var ar vro eur gernez spountuz. Abaoue pell-braz n'oa ket kouezet eur veraden c'hlaou euz an Env hag an douar-ze ken druz a ioa dizec'het hag evel rostet gat an heol bero. Ne zavé ket zo-ken eur goabren evit terri nerz an heol. An douar a renkas paouez da rei ed d'an dud ha peuri d'an anevaled.

Red oa eta lavaret kenavo d'ar vro-ze pe vervel gat an naoun.

Er c'huz-heol da zezert an Arabii, e zoa neuze eur rouantelez e kreiz he vrud, rouantelez Misraim, map Cham. Eiz dervez mad a vale hen doa da ober. Lod tud euz Kanaan ag a ioa bet e veachi dre ar vro-ze a gounte divar he fenn traou burzuduz hag a zigasse da zonj d'ar patriarch santel euz a vro gaer ar C'haldee. E kreiz etre daou venez e zoa eun draonien euz an dibab. Nebeud leoiou e doa a ledander, mez tri c'hant leo e doa a hirder. Ar ster vraz hanvet Nil a rede dre he c'hreiz. Bep bloaz, vardro ar memez mare, an douer en eur zont dreist-ar bord, a astenne var an douar eur vantellad lec'hid, druz evel teil, hag a lakea da zével ennhi eun tenzor a c'hreun hag a legumaj. En daou du d'ar ster, ee zoa bet savet keariou kaer, ker koant ha keriou ar C'haldee. Edo Theb, brudet dre ma zoa kant dor evit mont ennhi; Memphis, savet gat Misraim he unan evit beza ar gear genta euz ar rouantelez : Tanis, e kichen ar mor braz ha var hent broiou ar Sao-Hèol. A bep-tu ne veler nemed bodennou guez dudiuz, prajeier glazderet, eost dispar, keriadennou koant, leun a dud labourerien douar ha pastored. Eaz oa gouzoud e zea an Ejipt kalz galloudussoc'h, pinvidikoc'h ha desketoc'h eget an holl broiou all euz ar bed.

Siouaz ! evel holl bugale Cham, an Ejipsianed a ankounac'heas abred ar guir Doue, evit mont da zaoulina dirak an idolou, Da genta, o doa adoret an heol, hanvet gantho Oziris, hag ilizou kaer zo-ken o doa savet en he henor. Mez a nebeudou ha gat an amzer e tiskenjont izelloc'h. Kemeret a rejont evit

doueou al loened a velent dirak ho daoulagad, ar vioc'h, an taro, ar c'hrokodil, ar marc'h-vor, ar sparfel hag, en eur ger, an holl anevaled euz an ti, raz, logoden ha kaz. E kear Memphis oue savet eun aoter en honor an ejen Apis, lakeat da zoue braz en Ejipt.

Gat eur relijion grôz ha diskiant evel hounnez, n'eo ket diez divinoud petra' deuas da veza bugale Cham. En hem rei a rejont d'an holl dechou fall-ze o doa tennet malloz Doue var vap reuzeudik Noe. Bugale Misraïm a ioa pinvidik, diroll ha libertin. Ar roue he unan ioa er penn-kenta e rei dezho skuer fall. Chomm a rea e diabarz he balez evel eun doue ha peb faltazi, euz he berz, a ioa evel eul lezen. Pa zave c'hoant gantha da gaout e touez he blac'hed fall eur verc'h bennak euz eur famill pinvidik, e veze digasset houma dre he urz d'ar Roue evit beza he sklavourez. Abalamour d'ar c'halloud-se en doa ar Roue, eb beza diarbennet gant den, e savas meur a hini hag a c'hoanteas kaout he blass. Daouzek rumm pe famill a ioa bet, lerc'h-var-lerc'h, e c'houarn ar vro pa deuas d'i Abram, kasset gat ar gernez evel kalz tiegeziou all euz a vro Kanaan.

Roue an Ejipt a zonje dezha en doa peb guir var an daou estren, Abram ha Saraï, deuet var he zouarou. Rei a reaz eta urz da zaou euz he zervicherien da baka Saraï ha d'he c'hass e kamprou he verc'hed. Da Abram, avad, en doa roet urz da renta peb honor. Ar Roue a roas dezha e prezant eur maread ezen hag ejenned, azenezha ha kanvaled, mevelien ha mitizien. Kredi a rea, m'ar-vad, digoll evel-se Abram evit beza laeret Saraï.

Mez Abram en doa lakeat Saraï, he bried, dindan

goard an Doue holl-galloudek, n'hen devoa morse hen dilezet e kreiz he ankeniou. A veac'h oa kasset Saraï e palez ar roue, ma tiskuezas an Aotrou Doue pegement oa drouk-kountant euz eun henvelep laeronsi. Abalamour da Saraï e koez reuz-var-reuz var ar roue ha var he diegez. Kemenn a ra eta da Abram dont buhan d'he gaoud ha goulén a reas pardon digantha euz an taol-fall hen d'oa great.

Pa baouezas ar gernez, ar roue a roas urz d'he dud da zioual an Estranjour, d'ho diambrouk bete ar penn pella euz ar vro, hen, he c'hrek, he zervicherien hag he loened ha da lakaat evez na ve kollet netra euz ho danvez.

Abram a guitaas eta an Ejipt evit distrei adarre da vro Kanaan. Mont a reas a hed ar mor gat he dud hag he loened, ha goude beza treuzet an dezert, e teuas da ehana er c'hresteiz d'ar Palestiin, el leac'h ma oa bet diagent e chomm, etre Haï ha Bethel. Eno e kavas an aoter hen d'oa bet savet en honor ar guir Doue ha, var an aoter-ze, oue mall gantha kinnig adarre dezha eur sakrifis evit he drugarekaat da veza hen diouallet epad eur veaj ken hir.

Eun tam trouz savet etre he bastored ha pastored Loth, he niz, a roas da anaoud kaloun vad Abram. Doue en devoa benniget ar patriarch santel hag he niz iaouank kalounek a ioa bet eat d'he heul, e peb bro. Ho daou o doa kalz torrajou ejenned ha denved; ha Loth, koulz hag Abram; en doa eun niver braz a velien hag a ioa douget, evel just, evit ho mestr. Hogen, avechou, pa veze restriz an dachen, e veze re zifoun ar peuri evit kement all a anevaled. Setu ma save etre ar bastored, evit gouzoud

piou a vije tec'het pelloc'h. Abram ne felle ket dezha o dije sonjet ar C'hananeaned o devoa an disterra drouk an eil ouz egile, he niz hag hen; hag e lavaras da Loth « Va niz, emezha, arabad e ve an disterra tra etre c'hui ha me, etre ho pastored ha va fastored. Ar pezh a zere ouz ar breudeur, eo ar peoc'h. Sellit eta nak a vro a zo dirazomp ! Kit en tu ma plijo ganeoc'h : Ma zit a gleiz, me a ielo a zeou ; ha mar dit a zeou, me ielo a gleiz. »

Loth a zavas he zaoulagad da zellet ouz ar vroze, hag al loden a blijas dezha, oue an hini a zo treuzet gat dour ar Jourden. Eno oa bet savet kerioù pinvidik ha libertin, Sodom ha Gomorrh, abriet gat guez palmez, halek hag akassia. A hed ar ster, e zoa meziou braz leun a eost, prajeier glaz ha bokedou kaer. Ar c'hrec'hiennou divar-dro a ioa goloet a goat. Ar vro a-bez a zeblante evel eur jardin dudiuz plantet gat Doue hag henvel ouz traonien an Nil hen doa bet kement a guez o pellaat diouthi.

Loth a ioa c'hoaz iaouank ha ne ouije ket e zoa dindan an dianveaz kaer-ze kalz loustoni kuzet. Kimmiada' reas dioc'h Abram ha mont a reas da jomm da gear Sodom, ar gear impudik-se a ioa an Aotrou Doue skuizet dija gat he viltansou.

Abram a jommas e bro Kanaan ha ne zaremprede ket an dud fall. Doue ne zaleas ket da rei dezha rekompans. Renevezi a reas ar promesaou hen doa great en Ur hag e Sichem. En hem ziskuez a ra dezha raktal ma zeo dispartiet dioc'h Loth.

« Savit ho taoulagad, Abram, emezha. Divar genn ar menez a zo dindan ho treid, evessait e tu

ar Sao-heol hag e tu ar c'huz-heol, e tu ar c'hresteiz hag e tu an anter-noz. Iviziken, an douar-ze holl a vezo d'eoc'h ha d'ho pugale var ho lerc'h. Ar vugale-ze a vezo kement anezho hag a c'hreun poulteren a zo var an douar ; ha pa ve goest unan bennak da niveri ar boultren-ze, ne c'helfe ket c'hoaz niveri bugale Abram. Savit eta en ho sa ha kerzit dre ar vro-ma a dreuz hag a hed. Rak goulaoui a rei eun deiz ma vezo d'eoc'h.

Abram a ziblassas dioc'h-tu evit senti ouz Doue, ha goude beza treuzet bro Kanaan penn-da-benn, e teuaz da jomm e traonien Mambre, e kichen Hebron. Eno adarre, evel m'hen doa great diagent, e savaz eun aoter d'ar Guir-Doue ha gortoz a reaz gat fizians ma vije sevenet an traou kaer promet-tet dezha gat Doue.

IV.

RÒUE ELAM.

D'AR mare-ze, e zoa e bro Elam, en tu all d'an Tigr ha d'an Euphrat, eur roue gal-louduz hanvet Kodorlahomor. Ar rouanez a ioa bet var an tron en he raok, epad ar c'hantved tremenet, a ioa bet tud a vrezel hag a ioa deuet da veza mistri var an holl boblou euz ho amezegez. Eur vech treac'h da dud ar Mezopotamii, e zejont da jomm, gat ho doueou, da gear Suz, kear-veur an Elam. Kodorlahomor a ieas pelloc'h egetho. Kerzet a ra, a dreuz an dezert, bete ster ar Jourden. Pevarzek vloaz araok m'oa diouezet Abram er vro-ze, hen doa kannet rouanez Sodom ha Gomorrh, ar brinsed all euz ar Pentapol hag an holl dud divar-dro. Holl e rankent paea kargou braz da roue ourgouilluz Elam. Doue a gastize ar boblou keiz-se evit digeri dezho ho daoulagad, ho distrei diouz ho dizurziou hag ho lakaat da chench buez.

Hogen, dabenn daouzek vloaz, e teujont da skui-za e paea taillou da roue Elam hag en hem zafchont en he eneb. Kodorlahomor a ieas drouk enna. Gervel a reas d'he zikour an holl rouanez euz ar Mezopotamii : Amraphel, Roue Sennaar, Arioch, roue

Elassar, ha Thadal mestr ar bastored. Er goztezen all, edo mistri ar Pentapol : Bara, roue Adama ; Semeber, roue Siboim ha roue bihan Segor. Morse, var ribl ar Jourden, n'oa bet gullet na kement a rouanez na kement a dud, e doare d'en hem ganna.

Rouanez ar Pentapol a c'hortzas an inimied en draonien a zo goloet brema gat ar mar-vor. Mez petra oa tud brein gat an techou fall dirak tud digernez ar Sao-heol ? Rouanez Sodom ha Gomorrh a gemeras an teac'h. Al loden vrassa euz ho zoudarded a oue lazet hag ar re-all a ieaz a dreuz ar mezeziou evit rekour ho buez. Ar rouanez o devoa bet ar gounid a lakeas e skrab kement a ioa e Sodom hag e Gomorrh. Ne lezchont netra en ho dilec'h. Mont a rea eta d'ho heul berniou pinvidigez hag eun niver braz a brizounerien. Unan euz ar re-ma oa niz Abram. Ar paour-keaz Loth a velas tenna digantha kement munu-mad en devoa ha mont a ranke ouspenn e meaz ar vro da heul ar zoudarded kriz-se.

Abram a ioa neuze e chomm e Mambre, pell diouz an trouz. N'hen doa ket klevet menek euz ar brezel. Anaoudegez ha mignouniaj en doa great eno gat tri breur euz ar vro, Mambre, Eskol hag Aner ha beva ' rea laouen hag eb anken pa velas unan euz mevelien Loth e tont betek enna. Hema en doa gullet tec'hed kuit ha dont da gaoud Abram da gounta dezha ar peza a ioa c'hoarvezet. An Elamited o doa bet ar gounid. Laeret o devoa kement a ioa er vro hag he c'hasset da baour. Da Loth oa great evel d'ar re-all ha paket oa ive gatho evel prizounier.

Abram ne felle ket dezha dilezer Loth na lezer al

laeron-ze da veza mistri en eur vro ag a ioa promettët dezha gat Doue. Niveruz ha krenv oa an inimied. N'euz forz ; an hini a zo sikouret gat Doue ne zell ket ouz doareou he inimied. Abram a zastum en dro dezha tri-c'hant-trivac'h euz he vella servicherien hag assamez gat he vignoured, Rouanez Mambre, Eskol hag Aner, e zeas divar err a dreuz bro Kanaan, Bethléem, Salem, ar meneziou hag an trañniennou, da glask ar rouanez o doa gounezet ar viktor. Deuet oa ar pevare dervez pa velas, d'an abardaez, an Elamited, e tu an anter-noz, e kichen al leac'h bet hanvet *Dan* goudeze, tost da zoursennou ar Jourden. Divar gern ar menez e'velet tinellou an Elamited ha klevet a reat ive ho c'hanaouennou lirzin.

Klask gourin gat ken nebeud a dud oc'h eun arme ker braz hag a ioa evel follet gat ar viktor, a vije bet eur sottoni. Abram a c'hortozas eta ma vije deuet an noz tenval. Nêuze, pa ehanas ar c'hanaouennou, epad ma edo an Elamited kousket-mik, Abram a reas diou loden euz he dud. Peb rumm a gemeras he du evit sailla var an inimied strafillet hag eb armou d'en hem zifen. Eun distruj estranj a oue great anezho hag ar re a ellas savetei ho buez, e zeas Abram var ho lerc'h betek Hoba, a ioa a-gleiz da Zamas. Eun nebeud derveziou goudeze, e tizroe varzu Hebron, eun toullad tud var he lerc'h great prizonnerien - brezel, goazed ha merc'hed, Loth ive hag he famill hag an torrajou loened a ioa bet kemeret divar he goust, eb kounta ar pinvidigeziou all paket var an inimied.

Ne oad ket var c'hed d'an taol kaer-ze. Setu perak, dre gement leac'h ma tremene Abram, e

reat dezha al laouenna digemer. Roue Sodom a deuas d'he ziambrouk bete trañnien Save, hanvet goudeze trañnien ar Roue, evit he veuli hag he drugarekaat. Mez e touez an holl dud a deue da henori Abram, e oue gullet dreist ar re-all eun den koz, deuet ive da zaludi an hini a ioa bet treac'h da Rouanez ar Sao-heol.

Tud Kanaan ne c'houient ket e pe leac'h oa bet ganet. Hogen, ken eun oa ha ker santel m'ho doa hanvet anezha Melchisedech, da lavaret eo roue ar Justis. An den-ze a oue bet gullet, eun devez, e tont da jomm e touez ar c'herrek a zo bet savet varho goudeze kear Sion. Eno e verkas kenta doare ar gear a hanvas Salem, da lavaret eo kear a beoc'h. Eno, e guirionez, e vevas sioul hag e peoc'h, en eur zervicha a greiz he galon an Doue Galloudek, krouer an Env hag an douar, ha deski a rea d'an idolatred a ioa en dro dezha he anaout hag he garet. Ouspenn ma c'hadore Doue, e zoa belek dezha ; ha kinnig a rea dezha, e sakrifis, ne ket goad an anevaled, mez ar greun kenta euz ar guiniz hag ar bodou kenta euz ar vinien. Pegen douget bennak oa ar C'hananeaned d'ho doueou faoz ha d'ho zuperstisionou sot, ne ellent ket en hem gaoud gat belek-braz Salem eb stoui dirazha evel dirak eun eal diskennet euz an Env.

Melchisedech a deuas dirak Abram evel belek an Doue braz a ioa ive he Zoue. Kinnig a reas, e sakrifis, ar bara hag ar guin evit Hen tragarekaat euz ar viktor Hen doa roet d'he vignoun var an Elamited ha rei a reas he vennoz d'an den a galoun-ze, a ioa bet benniget araok gat Doue.

« Ra blijo gat an Doue holl-galloudek, emezha,



V.

DOUE EN HEM ZISKUEZ DA ABRAM.

ABRAM en doa neuze ouspenn pevar-ugent vloaz ha Doue n'hen doa ket roet dezha a vugale. Saraï, he bried, a ioa goal-goz ive evit sonjal kaout eun heritour. Setu perak hen devoa kalz neac'h e klask kompren e pe fessoun e vije sevenet evintha komzou kaer an Aotrou Doue, komzou sklear ha didroidel ha lavaret meur a vech. Eun abardaez, epad m'edo ar sonjou-ze e rodella en he spered, e klevas mouez an Aotrou Doue evit ar pemped guech :

« Arabad kaout aoun mui, a lavar ar vouez-se. Me ho tifenno hag a vezo ho rekompans meurbed kaer. »

Abram a gemeras hardisegez da c'houlenn digat Doue eun nebeud sklerijen divar benn al lignez vraz hen doa promettet dezha hag hen devoa lavaret diagent e vije ganet anezhi ar Messias, salver ar bed. Ha kaout a dlie hen he unan eur map, pe hen a renko kemeret map eun all evit heritour ?

« Aotrou, va Doue, emezha, ne ouzon ket petra o c'heuz c'hoant da ober evidon. Setu me o vont da vervel dizher. Rak an Damaskus-ma a zo map da

Eliezer, va mestr-mevel. Map va mevel a bez'e vezo eta va heritour ? »

An aotrou Doue raktal a respountas dezha : « Salokraz : Henez ne vezo ket oc'h heritour, mez eur mab ganet ac'hanoc'h. »

Goudeze Doue a gassaz anezha er meaz euz an telt. An noz a ioa sioul ha kaer hag eun arme a stered a lugerne e bolz an Env.

« Abram ! a lavaras-hen dezha ; savit ho taoulagad etrezek an Env ha niverit ar stered m'ar d'oc'h goest. Mad, emezha, ken niveruz e vezo ho lignez ag ar stered-se. »

Ne deuz netra dreist galloud an aotrou Doue. Abram a gredas, var an taol, d'ar gomz diskennet euz an Env. He feiz buezek, ar fizians hen doa bet bepred e Doue e kreiz he enkreiz, ar garantez a ziskueze ato dezha, o devoa abaoe pell amzer plijet da Zoue ha tennet varnha grassou kaer. Hogen, an taol diveza-ma her lakeas da blijout dezha muioc'h c'hoaz. Setu perak ar vouez a lavaras dezha : « Me eo an Doue hen deuz tennet ac'hanoc'h euz a Ur, er C'haldee, evit rei d'eoc'h an douar-ma hag ho lakaat da vestr varnhi. »

Abram a lavaras : « Va aotrou ha va Doue, penaoz e c'hellan-me gouzoud e vezin mestr d'ar vro-ma ? »

Doue ne reüzas netra d'he vignoun. Lavaret a reas dezha dispartia e touez he loened eun ouenner, eur c'havrik, eur maout tri-bloaz, eun durzunel hag eur goulm, ha prepar eur sakrifis evit toui mignouniaj etrezho.

Hervez ar c'hustum, Abram a drouc'has e daou dam al loened. Ober a reas anezho diou loden hag e

lakeas unan var peb hini euz an diou aoter en devoa savet, an eil dirak eben. An durzunel hag ar goulm a ioa chommet en ho fez hag a ioa lakeat var gorre al loened. Evit siella etrezho ar mignouniaj, e tlient an eil hag egile tremen etre an diou aoter, hag e ken-kaz a dreitouriaj e tlient hervez al lezen beza rostet evel an anevaled.

D'an abardaez-noz, Abram a ieas etre an diou aoter da c'hortoz ma vije deuet Doue d'en hem ziskuez.


Hogen, en eun taol, evel pa vije bet skoet, ar patriarch santel a zant en dro dezha eun denvalijen vraz. He gorv a deu da veza skuiz-marô ha koeza'ra gat ar c'hoant kousket. He spered ive a zo strafillet. Neuze e kev eur vouez o lavaret dezha sklear ha freaz ar pezh a zo ama varlerc'h hag a dle diouezout en amzer da zont.

« Deskit a-vrema, istor ho lignez. Ho pugale kasset kuit euz ho bro a vevo evel sklaved hag o devezo peb tra da c'houzaôn e douk pevar c'hant vloaz. Da benn-neuze me a skoio var ar bobl hen devezo ho goalgasset hag ho pugale vihan a deui er meaz euz ar vro-ze gat kalz danvez ha pinvidigez. C'hui a varvo koz hag a ielo da repoz e kichen ho tadou. Ho pugale vihan ne zistroint er vro-ma nemed goude ar pevare rumm, pa vezo Doue skuiz gat peñ hejou an Amorrheaned. »

A veac'h e doa ar vouez diskuliet an traou-ze ma velas Abram e tigeri e kreiz an denvalijen evel eur fournier-vraz, a deuas anezhi da genta eur voged teo ha goudeze eun tan-flamm hag a roste dre maez an holl loened kinniget e sakrifiks. Doue eo a dremene hag a reneveze mignouniaj gat he zervi-

cher Abram. « Ar vro-ma, eme ar vouez adarre, a roin d'ho lignez adalek ster an Ejipt betek an Euphrat. Ho pobl a vezo mestr var broiou ar Sineaned, ar Senezeaned, ar Sedmoneaned, an Heteaned, ar Pherezeaned, ar Raphaïted, an Amorrheaned, ar C'hananeaned, ar Jerjeseaned hag ar Jebuseaned. »

Pa deuas ennha he unan, Abram ne c'houie ket trugarekaat aoualac'h an Aotrou Doue evit ar vadez Hen devoa bet d'hen dibab evit traou ker burzuduz.





VI.

AR MAB HERITOUR.

Pa glevas Saraï ar pezh en devoa lavaret an Aotrou Doue ; pa glevas lavaret e tlie genel euz a Abram eur mab hag a vije bet heritour da bromessaou Jehovah, e sonjas ennhi he unan n'he devoa ken da ober nemed senti ouz Doue. Lavaret e reas eta d'he fried Abram kemeret evit eil grek, da lavaret eo evit grek euz a eur renk izeloc'h, Agar, he matez a ioa deuet gathi euz an Ejipt, he bro. Er penn kenta euz ar bed, Doue ne zifenne ket ar seurt dimeziou-ze. « Doue, a lavar Saraï, ne ro ket d'in a vugale : Mez Agar a roi d'eoc'h bugale hag a gemerin evel pa vent va bugale va unan. »

Saraï a bedas ker stard Abram ma c'hassantas ganthi. Hogen an Ejipsianez ne devoa na kaloun na spered he mestrez. Var zigarez m'oa benniget gat Doue ha dougerez, e teuas da ankounac'haat ne oa nemed matez. Dre he c'homzou, dre he zao-lioulagad, dre he zon rok, e fellé dezhi rei da entent da Zaraï e zoa-hi mestrez an ti, ha ne devoa Saraï nemed plega ha senti. Saraï, pa vel an dismegans great anezhi, a ra he c'hlemm da Abram hag a' ziskuill dezha ourgouill he zervicherez.

« Petra ! Va disprijout a ra, a lavar Saraï gat imor. Doue hor barno hon daou, c'hui ha me. »

E leac'h en hem zevel outhi ha diskuez dezhi pegen direzoun oa ar pezh a damalle da Agar, Abram ne reas nemed lavaret dezhi gant dousder : « Ho matez a renk senti ouzoc'h ; ha petra vir ouzoc'h da gorrija anezhi, pa vez izom ? »

Saraï a gavas mad an ali-ze roet dezhi gat Abram, hag an Ejipsianez, ker rok bete neuze, a renkas plega ha senti ouz he mestrez, dindan boan da veza kastizet. Houma a gollas he fenn ha kentoc'h eget plega, e kemmeras an teac'h hag e kerzas a dreuz an dezert, varzu he bro.

Eun dervez, goude beza great kalz hent etrezek Sur, ar plac'hik keaz a gemere eun tam diskuiz e kichen eur puns, kleuzet e kreiz ar vro digonfort-se. Lenva'rea a forz, ker reuzeudik oa, pa glevas eur vouez e komz outhi hag e lavaret :

« Agar, matez Saraï, euz a be leac'h e teuit ha da be leac'h e zit ? »

« Tec'het a ran, a lavar-hi, dioc'h va mestrez a zo facht ouzin. »

« Distroit dioc'h-tu varzu Saraï, ho mestrez ha sentit outhi. »

Neuze, evit he c'honforti, kannad Doue a zisklerias dezhi petra'dlie beza divezatoc'h ar c'hrouadur a zouge d'ar poent-se. Komz a rea a-berz Doue ha lavaret a reas dezhi : « Me'roi d'eoc'h kement a vugale ha bugale vihan ma ne c'hellor ket ho niveri. Ar c'hrouadur a lakeoc'h er bed, a rooc'h dezha an hano a Ismael evit digass da zonj d'eoc'h euz oc'h hirvoudou. Ismael a vezo eun den rog ha gouez. En hem zevel a rei a eneb an holl hag an

holl a en hem zavo en he eneb. En hem zavel a rei zo-ken a eneb he vreudeur. »

Agar, pa glevas ar c'homzou-ze, a guezas d'an douar, ha pa vel an eal e pignat kuit e lavar : « Doue a zo plijet gantha sellet ouz he zervicherezh. »

E memor euz ar velidigez-se, e c'alvas ar puns-ze, puns an Hini a zo bepred beo hag a vel peb tra. A veac'h oa distro da di Abram, ma c'hanas he mab. Ar patriarch Santel hen digemeraz evel heritour ar promessaou hag a roas dezha an hanô a Ismaël. Karet a rea kalz ar c'hrouadur-ze abalamour ma sonje dezha oa an hini galvet gat Doue da veza e penn he lignez. Hogen, trizek vloaz goudeze (Abram hen doa neuze naontek-ha-pevar-ugent) Doue a apparissas dezha adarre ha gant eur vouez krênv ha freaz e lavar dezha :

« Me, emezha, eo an holl-galloudek. Kerzit dirazhon dre hent an dud parfet. Me neuze a reio mignouniaj ganeoc'h hag a roi d'eoc'h bugale vihan eb kount. »

Abram a ieas d'an douar dirazha a stok he gorr, ha Doue a lavaraz dezha :

« Me, Jehovah, abalamour d'ar vignouniaj a ran ganeoc'h, ho lakai da veza tad da eun niver braz a boblou. Rak-se, iviziken, ne ket Abram a vezo ho c'hano, mez Abraham abalamour ma lakiin ac'hano-c'h da veza tad da eun niver braz a boblou. Lakaaat a rin ho lignez da greski en eur fessoun burzuduz hag euz al lignez-se e save meur a roue. Ar marc'had a ran ganeoc'h brema a jommo euz an eil kantved d'egile hag euz an eil rummad d'eben, etre me hag holl bugale Abram. Da viken e chomin ho Toue ha Doue ho pugale. Douar Kanaan, e

maoc'h brema varnha tremeniad, a roin divezatoc'h d'ho pugale, evit beza dezho da viken, dindan galloud Jehovah, ho Doue. »

Ar vistri a lakea eur merk var ho sklaved evit ma vijent anavezet. Doue ive a fellas dezha lakaat he verk var bobl benniget Abraham.

Ar merk a-zianveaz euz an alians a meuz great ganeoc'h a vezo ar Sirkonsizion.

Ho potred a vezo holl sirkonsizet d'an eizved dervez goude ma vezint ganet. Ar sklav ganet en ho ti pe otramant prenet ganeoc'h a vezo ive sirkonsizet ; kement hini ne zougo ket ar merk-se ne vezo ket euz va fobl. »

Abraham ne bade ket gat ar joa. Doue hen devoa roet dezha eur map. Seblantout a rea dezha deja guelet Ismaël e penn eur bobl niveruz, merket gat sin an Aotrou Doue pa glevas a-nevez mouez Jehovah. En dro-ma e vennas koll he benn gat re a eürusdet.

« Iviziken, a lavaraz dezha an Aotrou Doue, ne hanvoc'h ket mui ho pried Saraï, mez ebken Sara (prinsez), abalamour dezhi me a roio va bennoz ha dreizhi me a roi d'eoc'h ar c'hraouadur benniget a vezo mestr ar boblou ha tad da eun niver braz a rouanez. »


Abraham a zaoulinas neuze dirak Doue. He drugrekaata ra euz ar burzudou a ra evintha en he vadelez hag he drugarez. Dont a ra neuze da zonj dezha euz he vap Ismaël, a gave dezha galvet gat Doue da veza heritour he bromessaou.

« Aotrou Doue, emezha, plijet gat ho madelez lezel he vuez gat Ismaël ! »

« Sara e devezo eur map, a lavar an Aotrou, hag

ar map-se a hanvoc'h Isaac. Gat hennez ha gat he lignez e rin-mignouniaj. Ismaël ive, abalamour d'ho peden, a vezo benniget. Me a roio dezha eun niver braz a vugale. Kountet e vezo bete daouzek roue euz he lignez hag ar penn e vezo euz a eur bobl braz. Gouskoude, heritour ar promessaou a vezo Isaac, map Sara, a c'hano a benn bloaz. »

Goudeze, Doue a zisparissas. Abraham, evit senti a lakeas varnha ar sin merket gat Doue. Her lakaat a reas ive var Ismaël hag var holl servicherien he di. Evel-se, e save e touez ar baianed eur bobl nevez, pobl an Aotrou Doue.



VII.

AN TRI EAL.

EPAD m'edo Jehovah e tibaba evintha eur bobl e touez ar baianed, ar re-ma a bellea muioc'h mui dioutha hag a zileze he c'hour-c'hemennou. Keriou ar Pentapol, ha dreist-holl Sodom, Gomorrh, Adama, Seboim ha Bala en hem roe da bep seurt dizurziou ha loustoniaj. Kanet oant bet gat an Elamited; kargou braz a rankent da baea dezho abaoue daouzek vloaz; Abraham hag he niz Loth a roe dezho skouer ha kelennadur rez vad. N'euz forz. — En despet da gement-se, e chomment evel tud dall. Traônien dudiuz Siddim a roe dezho pinvidigez eb labour na skuizder. Drebi hag eva a reant. En hem deuler a reant d'ar plijadureziou vil, kement ha kement, ma savas keuz gat Doue, evel da amzer an diluj, da veza ho c'hrouet.

Nebeud derveziou goude an aliens great gat Jehovah, Abraham a ioa azezet var trujou he del, e traônien Mambre. Eur vezen dero, hir he skourrou ha druz he deliou, a rea toen azioutha a enep groez an heol bero. Setu en eur zevel he zaoulagad, e vel tri beajour ag a ra an neuz da zont varzu ennha.

Raktal, ar patriarch a ia varzu ennhio d'ho diambrouk ha goude beza stouet dirazho, e lavaras d'an hini a ioa doareet da veza ar mestr : « Aotrou, m'am euz kavet grass dirak ho taoulagad, ne dre-menoc'h ket a-biou da di ho servicher eb ober ennhio eun diskuiz. Rei a rin d'oc'h dour da voalc'hi ho treid hag eun ehan a reoc'h dindan toen an der-ven-ma. Goudeze, pa o pezo drebet evit krenvaat ho kalon, c'hui a ielo adarre gat ho c'hent. Rak setu perak, emichans, e zoc'h deuet varzu telt ho servicher. »

An tri divroad a ioa laouen meurbed euz an digemer great dezho gat ar patriarch santel. Abraham a ias dioc'h-tu en he delt da gaout Sara hag a lavaras dezhi : « Hastit buhan lakaat e go tri vuzul bleud ha poazit tri vara dindan al ludu. Etre-tant, e zeas he unan da zispartia e touez he loened eul leue druz ha tener hag he roas urz d'he revelien d'her poazad. — Ar re-ma a oue mall gatho rosta al leue. Neuze Abraham a lakeaz dirak he zianve-zidi leaz, amann, hag al leue hen doa lakeat da boazat. Chomm a reas en he za dindan ar vezen, epad m'edo ar re-ma e tribi. Pa oue echu ar pred, ar veajourien misterius a c'houlennas digat Abraham e pe leac'h e homme he c'hreg. « Sara, eme hema, a zo e diabarz an telt. » Neuze, unan anezo ho zri, an hini en doa Abraham saludet ar c'henta, a lavaras dezha : « Distrei a rin d'ho kuelek a benn-bloaz. Ho taou, e vezoc'h beo ha Sara, zo-ken, e devezo eur map. »

Chuchet a dreñ an or, Sara a glevas ar c'homzou diveza-ma ha ne ellas ket miret da vouse'hoarzin. « D'am oad-me, a zönje-hi, ha da oad va goaz,

penaoz e c'helfe dont da vir ar-pez a lavar an den-ze ?

« Sara, eme ar beajour, perak diskredi ha c'ho-arzin euz va c'homzou ? Hag eun dra bennak a ve-diez da Zoue ? Me a lavar d'eoc'h eta eur vech c'hoaz, da benn bloaz, me a zistroio d'ho kuelek hag ho pezo neuze eur mab. »

Abraham a anavezaz edo dirazha Doue he unan-gat he lagad dibikouez hag a vel peb tra, zo-ken e goeled ar galon. Sara a zo strafillet hag a glask digareziou. Hogen, an Aotrou a rebechas dezhi gant dousder beza manket a fizians. Goudeze, e savont ho zri evit pursu ho hent. Trei a reont varzu trañnien Sodom. Di o devoa doare da vont. Abraham evit ho henori, a ias d'ho diambrouk epad eur pennad hent. Neuze an Aotrou a lavaras : « Perak kuzet oc'h Abraham an taol justise maoun e vont da skei ? Ha ne ket hen eo am euz dispartiet evit beza penn eur bobl vraz ha gallouduz ? Ha ne ket ennhio e tle beza benniget an holl boblou euz an douar ? Rak gouzout a ran e roio urz, d'he vugale ha d'an holl vugale vihan a deuio var he lerc'h, da viret lezen Doue ha da vev er justiss hag el lealded, evit ma lakai Jehovah da zeveni evit Abraham kement Hen deuz promettet. »

Abraham, neuze, a stouas dirak he vestr hag he-ma a zispakas dirazhan ar pez hen devoa sonj da ober.

« Ar c'hri a zao euz Sodom ha Gomorrh a ia bepred var gresk. Bar eo ar muzur euz ho fec'he-jou. Disken a rin eta betek ennhio ha guelet a rin dreizhon-va unan, a ker ouaz ho deuz great ha ma zao an trouz a zao betek ennhon. »

An daou eal a ziblassas neuze ac'hano evit mont etrezek Sodom. Hogen, Abraham a jommas gat Doue. He galon a ranne gat ar velkoni, pa zonje e zoa kement a dud fall var-nez bezalakeat d'ar maro hag assamez gatho, marteze, kalz a dud vad. Sonjal a ra ive e Loth, he niz hag a'zo e vont da veza, gat he holl famill, distrujet er c'hearioru milliget-se. Tostaat a ra ouz Doue hag e lavar dezha :

« Aotrou, ha koll a reoc'h-hu an den mad gat an den fall ? Mar deuz er gear-ze anter-kant den just, a mervel a reint-hi gat ar re-all ? A n'he espernot-hu ket ar gear abalamour dezho ? Nan ! ne vezo ket lavaret o pezo great d'an dud ho kar evel d'ar pec'heur ! d'an den a vev en ho toujans evel d'an den difeiz ! C'hui, barner leal ar bed-holl, ne c'hellit ket dougen eun henvelep setans. »

Doue a respountas : « Abraham, ma kavan anter-kant den just e Sodom, me'zello a d'uez ouz ar gear a-bez, abalamour dezho. »

« Pa'meuz digoret kaoz, e livirin c'hoaz d'am Doue, daoust ne d'oun nemed poultr ha ludu. Ha ma ne vez kavet nemed pemp ha daou-ugent den just, a distruja' reoc'h ar gear a-bez ? »

« Nan, a lavar Doue. Espern a rin anezhi abalamour d'ar pemp-ha-daou-ugent den just. »

« A ma ne ve nemed daou-ugent ? »

« Ne skoin ket abalamour d'an daou-ugent-se. »

« Aotrou, me ho ped, na fachit ket mar kemeran kement a hardizegez ! Petra' reoc'h ma ne gavit nemed tregont ? »

« Truez a gemerin outhi abalamour d'an tregont. »

« A ma ne gavit nemed ugent ? »


« Mad ! ne skoin ket, abalamour d'an ugent-se. »

« Va Doue, selaouit va c'homz diveza : Petra' reoc'h ma ne gavit nemed dek den just ebken. »

« Abalamour d'an dek den just-se, e c'hespernin kear. »

Dioc'h-tu neuze, Doue a dec'has kuit hag Abraham a zistroas d'he delt, laouen-braz, abalamour ma krede e vije kavet e Sodom ouspenn dek den just hag en dije an Aotrou Doue espernet, abalamour d'an dek-se, ar gear reuzeudik.





VIII.

SODOM DISMANTRET.

GOUSKOUDE, daou gannad Doue a erruas er gear milliget vardro serr-nouz. Loth a gavchont e kichen dor kear. Hema, trugarezuz evel he eontr, e kenver an dud estren, a zavas en he za raktal m'ho guelas, a stouas dirazho hag a lavaras :

« Tud dianveaz, plijet ganeoc'h kemeret lojeiz e ti ho servicher. Sec'hi a reoc'h divar ho treid ar bouldren ha, varc'hoaz, e poursuoc'h adarre ho c'hent. » — Hogen, hi a lavaras e felle dezho tremen an noz er meaz, var an dachen publik. Mez Loth a reaz kement varnho ma renkchont mont gantha en he di, azeza ouz he daol ha preja gat bara eb goell.

Mez araok m'oant eat da gousket, e klefchot eun trouz braze c'harz dor an ti. Eun toullad tud a bep oad, bugale, tud koz, a ioa dastumet eno hag a iouhe a bouez penn o c'hervel Loth hag o lavaret dezha : « E pe leac'h ema an daou zen estren a zo deuet fe-nouz d'ho ti ? Digassit-ho d'eomp dioc'h-tu, ma ho guelimp. »

Loth a ia er meaz euz he di d'ho c'haout hag a

brenn mad an nor var he lerc'h, hag a lavar dezho ker brao ha tra : « Ne rit ket, me ho ped, an disterra drouk d'an dud-se. Rak deuet int d'am zi hag em c'harge maïnt. » Mez he gomzou ne reant nemed ho lakaat da vont muioc'h a-ze e kounnar. « Digassit anezho d'omp, eme ar Sodomited, pe ni hen talvezo d'oc'h. C'hui ho c'hunan ne doc'h nemed eun divroad en hon touez. Petra' eo d'eoc'h etak klask beza evel hor barner ? Diouallit mad ; pe ni a rei d'eoc'h ouassoc'h c'hoaz eget d'an daou zen-ze. »

Neuze e saillont var Loth hag edont e vont da derri an or pa zigoras houma anezhi he unan. An daou c'hoaz estren a begas e dorn Loth, hen tennas e diabarz an ti hag a brennas an or. Neuze e skojoñt a zallentez ar re a ioa er meaz adalek ar bihana betek ar brassa ; hag holl ne c'houient mui e pe leac'h skei nak e pe leac'h trei.

An daou eal a lavaras neuze da Loth perak oant deuet da Sodom. « Dizurziou Sodom, emezho, a gri venjans dirak Doue. Doue eo hen deuz hon digasset ama da zistruj kear ha da zebelia ar bobl abez dindan an tiez hag ar mogerioù dismantret. Mar ho c'heuz c'hoant eta da zavetei unan bennak euz ho kerent, ho mipien, ho merc'hed, ho mipien kaer pe eun all bennak euz ho famill, hastit affo ober dezho tec'het dioc'h ar gear milliget-ma. »

Loth a dlíe dimezi prestik he verc'hed. Mont a ra eta dioc'h-tu da gaout ar botred iaouank hag e lavar dezho sevel ha dont buhan d'he heul e meaz kear, abalamour edo Jehovah e vont d'he distruja. Ar re-ma a gemeras evel goaperez ar peza lavare dezho ho zad kaer ha ne rejont van.

Da c'houlou deiz, an Elez a boursue var Loth

tec'het kuit : « Savit, emezho, ha kassit ho kreg hag ho tiou verc'h, nemed c'hoant o peffe da veza kollet ho c'hunan e mesk an dud fall-ma. Evel ma talee, e krokchont en he zorn, e dorn he c'hreg hag he verc'hed, evit ho zenna er meaz euz an ti hag ho c'hass a rejont zo-ken er meuz euz a gear. Rak Doue a felle dezha ober dezho trugarez. Pa ouent diouezet var ar meaz, an Elez a lavaras dezho : « Brema klaskit eun dra ebken : savetei ho puez. Ne droit ket ho penn da zellet petra' c'hoarvezo var ho lerc'h. Ne zaleit ket er vro divar-dro, mez pignit diere var ar menez gant aoun na vec'h lazet ive. »

Loth a gren evel eur bern deliou. Spountet-holl ha poan dezha e finval, e lavar d'an Eal :

« Aotrou, pa zeo guir en deuz ho servicher kavet grass dirazoc'h ha pa blij ganeoc'h, dre drugarez, espern ac'hanon, roït d'in c'hoaz eun dra. Biken ne ellin pignat var ar menez ha mil aoun am euz na venn tizet ama gat dorn an Aotrou Doue ha na varfen. Roït d'in konje d'en hem repui er gear vihan a zo hanvet Bala. Betek eno ne vezo ket diez d'in mont. Eno e zeus nebeud a dud e chomm. Espernit anezhi abalamour d'in. » An eal a lavaras dezha : « Selaou a ran c'hoaz ho peden hag espern a rin ar gear a livirit. Mez hastit buhan d'en hem denna ennhi. Rak ne reimp drouk ebed ken na vezoc'h e meaz a zanjer. »

Adalek neuze, Bala a zo bet hanvet Segor, da lavaret eo *bihanik*.

An heol a zave var an douar pa erruas Loth e Segor. D'an heur-ze, ar gurun a groze spountuz ; al luc'het a darze eb ehan a dreuz an oabl. Neuze Je-

hovah a lakeas da gueza var Sodom ha Gomorrh eur mor a zoufr hag a dan. An douar a orjell hag ar punsou bitum (lastez raz) a ioa stank e traonien Siddim a begas an tan enno, dioc'h tan an Env. An dachen-ze ker koant a oue ouspenn beuzet dindan dour eul lenn hanvet Sale. Etretant an holl dud a ioa e chomm er Pentapol, rostet en eur mor a dan a ioa sebeliet dindan mogeriou dismantret ar c'heariou milliget-se.

Pa glevas eun henvelep trouz, grek Loth ne c'hellas ket miret da zellet var he lerc'h, daoust d'an difen great dezhi gat an Eal. Raktal e oue mouget gat eur vogidel soufr ha chenchet en eur bern halen hag en doa doare eur vaouez.

D'ar mare-ze ive, Abraham savet mintin-mad a gerze varzu al leac'h ma oa bet, en derc'hent, an Aotrou Doue e komz outha. Sevel a reas he zaoulagad etrezek Sodom, Gomorrh hag ar broiou all tro-var-dro. Hogen ne velas nemed eur goumoulen ledan a ludu bêro hag a zave divar an douar evel ar voged euz a eur fourn goret. Braz meurbed oue he anken. He velkoni a oue dousseat evelato abalamour m'hen doa Jehovah, dre respet evintha, diouallet euz eur maro ker kriz, he niz Loth hag he famill.

Pa zistroas divezatoc'h da velet doareou ar vro reuzeudik-se, kaer en doa sellet, ne vele a bep tu nemed merkou sklear euz a venjans an Aotrou Doue.

Traônien goant an Akasia a ioa goloet gat eul lennad dour du ha teo. Sodom, Gomorrh, Adama, Seboïm, ho ilizou, ho faleziou, ho zies kaer, n'oant mui nemed berniou ludu ha mein rostet. Ne jomme

ket eur begad glazder er c'harter-ze ker gae diaraok. Ne glevet ennhha na mouez an den na kanaouen al labouss. Al lenn-ze gat he dour maro hag en dro dezhi gat ar menezioù disto ha du a ioa henvel ouz eun arched ledan ha nē bar morse a zioutha nemed ar maro.



IX.

AGAR HAG ISMAEL.

NEBEUD amzer goude ma oue dismantret Sodom, Abraham a guiteas tachen dudiuz Mambre evit mont da jomm er c'hresteiz da vro Kanaan, etre Kades ha gouelec'h Sur. Tremen a reas dre Jerara, kear-veur ar Philistined, gouarnet d'ar-mare-ze gat ar prins Abimelek. Hema a reas ar c'haerra digemer da belerin Jehovah hen doa klevet komz anezha diaraok. « Guelet a rit-hu, emezha, an dachen vraz a zo duze dirak ho taoulagat. Kemerit ennhha al leac'h a gavoc'h ar guella evit mont da jomm ennhha. »

Abraham a zavas he deltou e kreiz ar gouelec'h (dezert), er c'hresteiz da Jerara. Kement ha ker buhan e kreskas gantha an traou, ma savas aoun gat Abimelek, na deuje da veza treac'h dezha. Dont a reas eta, eun dervez, d'he gaout gat Phicol, kabiten he armeou, evit kinnig dezha ober le a vignouniaj etrezho.

« N'euz forz petra a rit, a lavar Abimelek, Doue a skuill bennoz varnoc'h. Touit d'in drē an Doue-ze ne reoc'h morse an disterra drouk na d'in-me, na d'am bugale, na d'am zud all; hag e vezoc'h mad evidon hag evit va fobl evel ma z'oun bet mad evidoc'h, petra bennak ma z'oac'h eun den a zianveazbro. »

« Me a rei al le a c'houlennit, a lavar Abraham. Mez araok, lavarit d'in, mar plij, petra eo d'ho tud beza kemeret, divar va c'houst, ar puns toullet gat va mevelien. »

Abimelek a lavaras da Abraham n'hen devoa bet morse anaoudegez euz al laeroni-ze : « Ne anavezan ket, emezha, ar re ho deuz great an taol-ze na morse n'he m'euz klêvet ger a gement-se. »

Abraham neuze a ginnig d'ar prins Philistin e prezant ejenned hag oaned; ha goudeze e rejont ho daou al le a vignouniaj. Pa oue deuet an heur da gimmiada, ar patriarch a zispartias seiz danvadez iaouank. Abimelek a c'houlenn digantha petra hen deuz c'hoant da ober gatho. Abraham a respount. « Ho c'hemeret a reoc'h diganen evel eun testem' a jommo atao e zeo Abraham eo hen deuz toullet ar puns-ze. »

Goudeze, ar puns-ze a zo bet hanvet Bersabee, da lavaret eo puns al le abalamour ma zoa bet test euz ar c'honklu great etre an daou zen a zoare-ze.

Abimelek a zistroas d'he gear a Jerara, laouen braz hag euruz da veza great anaoudegez gat an hini a hanve den Doue.

Abraham, mestr iviziken d'ar puns ha d'an dachen a ioa tro-var-dro, a blantas guez evit disheolia he deltou. Sevel a reas eno ive eun aoter da Jehovah, an Doue da viken benniget, hen devoa great evintha kement a vurzudou hag hen devoa lakeat da zeveni he bromessaou kaer. Rak d'ar mare merket gat an Elez, Sara e doa roet dezha eur map en eur lavaret : « Daoust a Doue n'hen deuz ket roet d'in leac'h da c'hoarzin ha piou ne c'hoarzo ket pa glevo petra' zo c'hoarvezet ganen. »

Setu eta ema Sara e vont da vaga gat he leaz eur map da Abraham he fried eat en he gantved blavez. Piou en dije gortozet eun henvelep mirakl ?

Ia-da — Abraham hen doa kant vloaz pa c'hannas dezha he vap. Her sirkonsiza' reas d'an eizved dervez ha rei a reas dezha an hano a Isaac, da lavaret eo e brezounek, map ar c'hoarz hag al leve-nez. — Abraham, siouaz ! ne ouie ket neuze pement a zaelou a dlîe da skuilla abalamour da vap ar c'hoarz !

Pa deuas ar mare da zizoun ar c'hrouadur, Abraham a roas eul lein vraz d'an holl dud euz he vreuriezh (tribu) hag ar re-ma a ioa joa gatho gullet e kreski hag e krenvaat map hag heritour ar bromessa. Unan ebken a ioa tenval he benn, Ismaël. Agar, guechall, e doa disprijet he mestrez. Evel-d'hi he mab ne glaske nemed an dro da anjinat map Sara ha zo-ken goal-gass a rea anezha avechou. Houma drouk-kountant a lavar grounds da Abraham » Kassit kuit ar vatez-se hag he mab : Rak mab ar vatez ne dle ket herita gat va map-me. »

— Ar c'hlemmou-ze a ioa seac'h hag ar patriarch a jommas mantret. Tad Ismaël, a lakaat a c'helle er meaz he vap hamam he vap ? Doue hen tennas a enkre en eur lavaret dezha :

« Sara ne ket bet re rust e kenver ar vatez hag he mab. Grit ar pez he deuz goulennet diganeoc'h. Rak Isaac, hag Isaac ebken eo an hini a deui anezha ar ouenn a zougo ho c'hano. Ismaël ive, abalamour ma zeo ho mab, a lakiin e penn eur bobl gal-louduz. »

Abraham a zavas mintin-mad. Kemeret a reas bara hag eur podad dour. Ho zamma'ra var skoaz

Agar ha goude beza roet dezhi Ismael, he map, e kimmiad diouthi.

Greka paour! noa ket eb nec'hamant e tec'he euz ar vro-ze, peg e dorn he c'hrouadurik. C'hoant e devoa da vont d'an Ejipt, he bro goz. Hogen, fazia' reas divar an hent mad, e kreiz gouelec'h Bersabee. Ne ouie ket dre be hent kerzet. Ouspenn-ze ne devoa mui a vara hag an dour a ioa evet betek ar veraden diveza. N'oa ken da ober nemed mervel, hi hag he c'hrouadur. He lakaat a ra eta ec'harz treid eur velen. Eur zell diveza ra varnha ha goudeze e za pelloc'h var ed eun tenn bir. Eno e c'hazes, ha ran-net he c'halon gat ar c'hlaç'har e lavar : « Da vihana, ne velin ket va map e vervel. »

Lenva' ra a forz : Hirvoudi a ra. Ar c'hrouadurik a ouele ive pa oue klevet eur vouez diskennet euz an Env a dreuz an oabl hag a lavare d'ar vam baour-ze :

« Agar, petra' rit-hu? Perak fall-galoni? Jehovah hen deuz klevet daelou ho mab e c'harz ar velen. Savit. Pegit e dorn ho map ha kit dre hoc'hent. Ismael a vezo ar penn euz a eur bobl vraz. »

Doue neuze a zigoras dezhi frank he daoulagad. Agar, pa zellas en dro dezhi, a velas eur feunteun leun a zour hag ennhu he kargaz adarre he fod. He mabik a evas euz an dour-ze ha dre-ze oue saveteat dezha he vuéz, dre virakl.

Goudeze, Doue ne ehanas da zikour mab Abraham, he vignoun. E douk he iacouankiz, Ismael a vevas er gouelec'h hag a deuas da veza eb he bar da denna gat ar ouarek (Baltam.) Pa oue deuet da veza goaz aoualac'h, e timezas gat eur plac'hik, euz an Ejipt, klasket dezka gat he vam.

X.

AR SAKRIFIS.

RESKI a rea Isaac e ti he dad Abraham. Pemp bloaz var n'ugent en devoa. Koant oa ha santel. Ar patriarch koz n'hen doa mui a ziegi o vervel, dre ma chomme var he lerc'h eur map, heritour euz ar promessaou great gat Doue hag a dlíe lezer var he lerc'h eur ouenn dud ker stank a stered an oabl.

Dre ma sonje en traou dudiuz-se he galon a dri-de. Hogen, eun dervez, e klev eur vouez hag a ana-vez evit beza mouez Jehovah.

« Abraham! Abraham! »

« Setu me ama, Aotrou »

« Kemerit ho map unik, ho map muia karet, ho c'hIsaac, ha kassit-hen bete douar Moriah. Eno, c'hui her c'hinnigo d'in e sakrifis var unan euz an torgennou a ziskuezin deoc'h. »

An urz-se a ioa kaled evit kalon Abraham, hag hema ne ouie mui petra da zonjal var bouez ar promessaou koz. Chomm a ra mantret. Evelato, ne zonjas na klemm na dizenti. Doue eo en doa komzet. An den n'en doa nemed stoui dirazha hag esperout a eneb peb esperans. Sevel a ra eta araok an deiz; lakaat a ra ar bass var he azen evit mont

en hent. Koat a drouc'h ive evit ar sakrifs. Neuze, assamez gat daou euz he vevelien ha gat he vab Isaac, e kerz varzu ar vromerket gat Doue.

Kerzet a reas evel-se daou zervez dioc'h-tu, he galon rannet. Ne grede ket zo-ken sellet ouz Isaac, na komz outha. D'an trede deiz pa zao he zaoulagad da zellet ouz ar vro a zo dirazha, e vel menez ar sakrifs. « Chommit ama gat an azen, a' lavar d'he vevelien : va mab ha me a bigno var an dorgenn ha goude beza adoret Jehovah ni a zistroio betek ennoc'h. »

Kemeret areas neuze ar c'heuneud evit ar sakrifs hag ho lakeas var chouk Isaac. Gantha oa an tan hag ar c'hleze hag e lavaras iao. An tad hag ar mab a gerze kichen ha kichen eb lavaret grik. Abalafin gouskoude, Isaac a gomzas ouz he dad :

« Tad, emezha ! »

« Petra eo, va mab ? »

« Me a vel ama koat ha tan evit ar sakrifs : mez e pe-leac'h eta ema an hosti ? »

« Va mab, Doue a bourveo, a respountas Abraham, en eur voustra he zaëlou. »

Pignat a reont gouskoude varzu kern ar menez, sioul, eb an disterra ger. Pa zint erruet var lein ar menez, Abraham a zao eun aoter hag a zresse ar c'hoat varnha evit ar sakrifs. Neuze he c'hanzavas ouz he vab muia karet an urz roet dezha gat Doue. « Doue, emezha, hen deus lavaret d'in : Kemerit ho mab Isaac ha kassit anezha var menez Moriah. Eno c'hui her c'hinnigo d'in e sakrifs. » — Evel eun oanik, Isaac a lezas, eb klemm, liama he dreid hag he zaouarn hag a c'houzanvas beza lakeat en he c'hourvez var ar c'heuneud. Abraham neuze a

astennas he zorn. Kregi a reas en he gleze hag edo e vont da skei var he vab pa glevas eur iouaden a-zioud he benn.

« Abraham ! Abraham ! eme ar vouez. »

« Setu me ama, eme ar patriarch santel a anaveze mouez an Eal. »

« List ho kleze da guezha d'an douar ha diouallit-mad da douch ouz ho krouadur. Anaout sklear a ran brema ho c'heuz doujans Doue pa z'eo guir, evit senti ouzin, edoc'h e vont da laza ho mab unik. »

Eur c'hria a levenez hag a anaoudegez vad a deuas assamez euz a galon an tad hag euz a galon ar mab. Ho daou e stouont d'an douar evit adori an Doue holl-madelezuz.

Pa zavas en he za, Abraham a velas eur maout, luiet he gerniel e-touez an drez. Her lakaat a ra var an aoter e leac'h Isaac hag her c'hinnik a reas e sakrifs da Zoue. E memor euz an Doue a vel peb tra hag a oar pourvei ker brao da holl Ezomou an dud, al leac'h-se oue hanvet menez ar Velidigez pe apparision.

Doue ne zaleas ket da rekompani Abraham. Jehovah her galvas evit an eil guezha hag a lavaras dezha sklear ha freaz : « Hen toui a ran dreizhon va unan, emezha, abalamour d'ar pezh ho c'heuz great dre garantez evidon ha ne espernec'h ket zo-ken ho map unik, me a roio d'eoc'h va bennoz. Me a lakai ho ouenni da greski ker stank hag ar stered, ker stank hag ar grouanennou treaz a zo var an aotchou. Ho pugale a vezo treac'h d'ho holl inimiad hag an holl boblou euz an douar a vezo ben-niget en Hini a c'hano euz ho lignez. Setu petra' vezo talvezet d'eoc'h beza sentet ouzin. »

An Hini a gomze evel-se ouz Abraham oa map unik an aotrou Doue he unan, ar Messias, promet-tet gat Dote da Adam, prest goude he bec'hed.

Abraham a ioa var c'hed d'an Hini a die ho za-vetei. Gouzoud a rea e tlie genel euz he lignez ha mall hen doa da velet e c'houlou deiz kaer ar Redempcion. He ene, douget var eur garantez bir-vidik, a nije varzu an amzeriou da-zont. Eat evel er meaz anezha he unan, ar patriarch santel a velas mab unik an Aotrou Doue, diskennet euz an En-vou, great den evit silvidigez ar bed ha deuet dre he c'hinivelez da veza guir vab Abraham.

Her guelet a reas, evel eun eil Isaac, e tougen var he ziskoaz koat ar sakrifs, betek al leac'h m'hen doa Doue gourc'hemennet da Abraham lakaat he vab d'ar maro. Guelet a rea ar goad e ruill hag an hosti e vervel. — Ar bed a ioa saveteet. Abraham, pa zonje er rann-galon hen devoa bet var menez Mo-riah, a vele pegement a garantez hen deus an Aotrou Doue evit an dud, pa zeo guir e ro he vap unik evit ho frena. Dont a ra ive daelou a joa en he zaou-lagad pa vel an holl boblou euz an douar goalc'het gat goad an oan divin ha pa ho c'hlev e kana kan-tikou dudiuz e c'harz treid Jehovah!



XI.

ELIEZER HA REBEKA.

ABRAM a ioa deuet en oad da gimmiada diouz ar bed-ma ha da vont da repoz e bez he dadou koz. Araok mervel, e felle dezha gouskoude c'hoaz evit he vab eur vaouez dioc'h he zoare hag a zoujans Doue. Setu perak e lavaras, eun deiz, d'ar c'hossa euz he zervicherien, he hano Eliezer : « Touit d'in, emezha, dre Jehovah, Doue an Env hag an douar, ne rooc'h evit pried d'am mab hini euz a verc'hed Kanaan. Hogen, mont a reoc'h bete va bro-me hag eno e touez va zud nez, c'hui a glasko ar pried a ve mad evit va mab muia karet. »

Pa lavare an traou-ze d'he vevel koz, ar patriarch santel a zonje e famill Nakor, he vreur, a ioa chom-met en Haran pa oa-hen deuet er Mezopotamii. Deuet oa betek ennha ar c'helou en doa bet he vreur Nakor eiz mab, digat Melka, he c'hreg. Unan a ioa Hus he hano. Hema oa ar map hena. Eun all a ioa Kamuel. tad ar Sirianed, hag egile oa Bathuel, tad Laban ha Rebeka.

Eliezer a vele n'oa ket he gevridi eb danjer. Setu perak, araok tui, e lavaras d'he vestr : « Ha ma na fell ket d'ar plac'h am bezo choazet dont d'am

heul da vro Kanaan, a kass a rankin-me ho mab d'ar vro hoc'heuz kuiteat ? »

« Biken jamez ! a respount Abraham. Diouallit da ober traou evel-se. Doue an Envou, an Doue-ze en deuz tennet ac'hanon euz a di va zad hag euz an douar ma z'oun ganet ennh, hen deus touet rei d'in ha d'am lignez ar vro e m'oump e chomm ennh. Hen he unan a zigasso d'eoc'h eun eal evit ho kelen ha diskuez d'eoc'h an hent hag ar verc'h a zo dispartiet gantha evit beza pried d'am mab. Ma ne fell ket d'ar plac'h-se dont d'ho c'heul, ne vezo ket dalc'het ho le ouzoc'h. Mez, gat a reoc'h, ne gassit ket va mab d'am bro-goz ! »

Eliezer a douas d'he vestr hen dije heuliet, penn-da-benn, kement a ioa gourc'hemennet dezha. Kemeret a reas daouzek kanval euz an dibab. Varnho e sammas a bep seurt prezantchou pinvidik hag e kerzas varzu Haran, er Mezopotamii, gat eun niver braz a vevelien oc'h he heul.

Goude meur a zervez bale, e zeas en tu all d'an Euphrat hag e chommas da ehana eno, d'an abar-daez, e kichen eur puns toulet tostik da gear. D'ar mare-ze e teue ar merc'hedigou di da gerc'hat dour.

« Jehovah ! Doue va mestr Abraham ha va hini, a lavar ar mevelmad, setu deuet ar poent d'eo-c'h da zont d'am zikour ha da ziskuez ho karantez evit va mestr. D'ar feunteun-ma a zo ama em c'hichen, e teuio bremaik merc'hed kear da gerc'het dour. Ar plac'h a lavarin dezhi izelaat he fod-dour evit ma c'hellin eva hag a lavaro d'in : « Evit, ha goudeze me' roio da eva d'ho kanvaled », grit ma vezo hounnez ar pried dibabet ganeoc'h evit ho

mignoun Isaac. Dioc'h ar merk-se e c'hanavezin pegement e karit va mestr. »

A veac'h hen devoa perachuet he beden ma velas e tostaat ouz ar feunteun eur plac'h iaouank, koant evel eun eal, eur pod gathi var he skoaz. Tostaat a reas ouz ar puns. Leuna' reas he fod hag edo e vont d'ar gear pa deuas Eliezer d'he c'haout ha da lavaret dezhi : « A c'hui a elfe, emezha, rei d'in eur bannac'hik dour da derri va ze-c'hed ? »

« Evit, aotrou, a lavaras ar plac'hik koant, en eur zoubla he fod-dour. » Brema pa oc'h euz evet, emezhi, me a ia da glask dour d'ho kanvaled evit ma c'hellint eva d'ho zro. »

Teuler a reas ar peur-rest dour er c'haniau. Mont a reas affo d'ar puns ha tenna' reas anezha dour aoualac'h evit ar c'hanvaled. Etretant, Eliezer a zelle piz ouz ar plac'hik eb lavaret ger. Nec'het maro oa defot gouzoud pe e zoa pe ne oa ket ben-niget ker buhan he veaj. Evit gouzoud sklear ar virionez e za da gaout ar plac'h iaouank. Kinnig a ra dezhi e prezant bouklou-diskouarn aour hag a boueze daou *Sikl* (pemp skouet pe var-dro), ha diou jaden aour evit ober tro he divrec'h hag a dalie vardro daou-ugent skouet (Frans). Goulen a reas neuze diganthi : « Pe hano hen deus ho tad ? ha lojeiz a elfec'h da rei d'in en ho ti ? — Ar plac'hik a respountas : Rebeka eo va hano, ha merc'h oun da Vathuel. Bathuel, va zad a zo mab Nakor ha Melka. Du-ma e zeus kalz lojeiz. Kolo ha foen a zo ha frankiz evidoc'h hag evit ho kanvaled. »

Daëlou a joa en he zaoulagad, Eliezer a stouas d'an douar hag a adoras an Aotrou. « Benniget ra

vezo Jehovah, emezha, Doue Abraham. N'hen deus ket manket da veza trugarezuz evit va mestr ervez m'hen doa promettet, ha va digasset hen deus rake eun bete ti an Aotrou. »

Pa glevas ar plac'hik hano Abraham, e zeas d'ar red da gaout he mam ha da gounta dezhi ar pezh he doa klevet. Laban, pa oue kountet dezha an traou, ha pa velas ar prezantchou kaer great d'he c'hoar gat an den estren, a i eas buhan ha buhan betek ar feunteun. Eno, e kavas Eliezer en he za e kichen he ganvaled. « Deuit, emezha, o den mignoun da Zoue; deuit d'am zi-du-ma. C'hui a gavo lejeiz evidoc'h ha frankiz evit ho loened. »

Laban a gassas anezha d'he di. Dizamma' reas he loened; rei a reas dezho foenn ha kolo da zribi, ha goude beza goalc'het ho zreid d'an den-ze ha d'an dud a ioa oc'h he heul e kinnig dezho eur predboued. Goude eun henvelep skuizder, e tlient kaout mall da zebri. Mez Laban a jommas sabatuet pa glevas Eliezer elavaret dezha :

« Me ne zrebin na ne evin, ken ma mezo diskarget va c'halon en ho kalon. »

« Komzit eta, emezha »

« Me'zo mevel gat Abraham, a lavar Eliezer; ia-da; mevel Abraham anavezet e peb leac'h ha karget gat Doue a henor hag a binvidigez. Doue hen deuz roet dezha ejenned ha denved, ezen ha kanvaled, aour hag arc'hant, mevelien ha metizien. Ouspenn-ze Sara, he c'hreg, e deuz roet dezha en he gozni eur mab hag a vezo heritour euz an holl vadou-ze. Hogen, va aotrou ha va mestr hen deus great d'in toui ne mije morse dimezet he vap da eur plac'h euz a vro Kanaan. Kemennet hen deus

d'in mont varzu ti he dad guechall ha klask eno eur pried a zoare evit he vab, en he gerentiaj. Hirio, pa zoun erruet gat ar feunteun a zo e kichen kear, em euz lavaret da Zoue : « Grit ma vezo ar plac'h iaouank a roio da eva d'in ha d'am c'hanvaled ar vestrez ho c'heuz choazet evit va mestr iaouank. Raktal, Rebeka a deuas dirazhon ha pa her goulenis digathi, e tosteas ouzin he fod-dour hag e roas d'in da eva. Rei a reas ive da eva d'ar c'hanvaled. Setu perak e kinnigis dezhi bouklou aour evit he diskouarn ha chadennigou aour evit he divrec'h. Pa glevis goudeze oa merc'h Bathuel ha merc'h vihan Nakor ha Melka, e kuezis d'an daoulin dirak Jehovah hag e trugarekais Doue Abraham d'am beza kasset ker buhan hag evel dre an dorn bete merc'h he vreur, betek an hini a ioa galvet da veza pried d'am mestr iaouank. Lavaret a ris dezho : « Mar demaoc'h er memez santimant gat va mestr, livirit d'in; ma ne maoc'h ket a-unan gantha, livirit ive ha me' n'hem droio en eun tu all bennak. »

Laban ha Bathuel, he vreur, no devoa netra da zislavaret. « Doue, emint-hi, eo en deus komzet dre ho kinou. Diskuezet en deus d'eomp sklear aouala-c'h petra' fell dezha. N'hor beuz netra da lavaret a eneb. Rebeka a zo eta d'eoc'h. Kassit-hi ganeoc'h ha ra vezo pried ho mestr, pa zeo guir eo bolontez Doue. »

Pa glevas ar c'homzou-ze, an den mad Eliezer a stouas d'an douar ha leun a anaoudegez vad he c'hadoras Doue. Dispaka' reas goudeze he binvidigez, traou kaer, guiskamantchou aour hag arc'hant hag ho roas e prezant da Rebeka, d'he mam ha d'he breudeur.

Neuze e tigoras ar fest ha padout a reas mil fell en noz.

Antronoz vintin, minten-mad, Eliezer a lavaras da gerent Rebeka : « Lezit ac'hanomp d'a vont d'ar gear. »

« Da vihana, emezho, lezit hor merc'h da jomm ganeomp eun dek dervez bennak ha goudeze e zei d'oc'h heul. »

« Me ho ped, ne rit ket d'in dale ama, a lavaras Eliezer. Doue eo hen deuz va digasset ha va mestr a zo e c'hortoz ac'hanon. »

Ne ouient petra da respount ha sete e c'halvont ar plac'hik hag e lavaront dezhi : « Ha kountant oc'h da vont gat an den-ma ? »

« A greiz-kaloun, a lavar Rebeka. »


Raktal, oue great he fakad evit mont kuit. Ar plac'h nevez hag he magerez assamez gathi a ia da heul Eliezer. He c'herent a rekete evit-hi peb seurt mad : « C'hui'zo hor c'hoar, a lavarent-hi ; kreskit ha kreskit c'hoaz ken na vezo ho lignez treac'h d'an holl boblou euz an douar. »

Rebeka hag he merc'hed a bignas var ar c'han-valed hag a iea var lerc'h Eliezer. Hema a denne berra ma c'helle varzu he vro ha ti he vestr.

D'ar mare-ze, Isaac a ioa e chomm e Bersabee. Eun dervez, oa eat da vale e tu puns an Hini a vev hag a vel. Mil zonz a dreuze he spered pa velas, vardro kuzheol, eur bochad tud e tont varzu ennha, Rebeka a droas ive da zellet varzu Isaac hag a lavaras da Eliezer : « A c'hui anavez an den-ze a zo erru ahont ? »

« Va mestr iaouank eo, a lavaras dioc'h-tu Eliezer. »

Kerkent, ar plac'h iaouank a ziskennas divar he c'hanval hag a lakeas eur voal var he bizaj. Dija Eliezer a ioa etre divrec'h he vestr hag a gounte dezha istor he veaj. Nebeud derveziou goudeze oue great eur fest braz. Abraham a ioa laouen ; rak Isaac a ioa pried da Rebeka.





XII.

MARO ABRAHAM.

ABRAM a ioa e kaon d'he bried santel Sara, Ieshanvet prinsez gat Doue. Dimezi he vab gat Rebeka a lakeas eun nebeud laouenidigez en he galoun.

Seitek vloaz ha tregont goude m'oa ganet Isaac, d'an oad a seiz vloaz ha c'huec'h-ugent, Sara fellas dezhi gullet eur vech c'hoaz traonien Mambre, al leac'h m'ho devoa an Elez digasset dezhi ar c'helou kaerra euz he buez. C'hoant e doa da azeza eur vech c'hoaz dindan toen ar vezen en devoa disheoliet daou gannad Doue. Mez ne jommas ket pell amzer e traonien Mambre, hanvet divezatoc'h Hebron. Doue he galvas euz ar bed-ma.

Abraham a deuas gat he vab da ouela d'ar c'hreg-se e doa dalc'het kompagnunez dezha. epad kement a vlaveziou hag e devoa hen heuliet e peb leac'h. Fellout a rea dezha renta peb henor d'he brinsez. Goude ar c'haon hag ar pedennou kustum, Abraham a ieas da gaout bugale Heth, mistri ar vro-ze, evit prena digatho eul leac'h da zebelia he bried.

« Me a zo en ho touez eun estranjour, eun tre-

meniad. Dont a ran, emezha, da c'houlén diganed-c'h guir da zigeri eur bez evit diskenn ennha va greg, nevez-maró e Mambre. »

« Aotrou, emezho, c'hui a zo en hon touez eur prins benniget gat Doue. Kemerit ar c'haerra euz hor beziou. Den ne viro ouzoc'h diskenn ennha an hini e maoc'h e kaon dezhi. »

Abraham a stouas betez an douar evit trugarekaat bugale Heth da veza komzet ker brao. Gouzoud a rea gouskoude ne doa ar fessoun-ze da gomz nemed eur c'hiz e touez poblou ar Sao-heol.

« Mar kavit deread ar pezh a c'houlennan, me ho ped d'am zikour da brena oc'h eur priz onest, digat Ephron, mab Seor, an daou gavargn a zo dezha, e traon he bark. »

Ephron a ioa neuze e mesk an dud bodet var an dachen, e kichen doriou kear. Hema a ioa eun den ag ouie beva, evel he genvroiz.

« Va aotrou, emezha, ne dei ket an traou evel-se. Dirak an holl dud a zo ama, me a ro d'eoc'h va fark ha va c'havargn Macpelah hag eno c'hui a lakai an hini ho c'heus kollet. »

Evit an eil guez, Abraham a stouas dirak an dud-se; mez dioc'h-tu e lavaras dezho ne c'helle ket kemeret an douar-ze evit petra.

« Va list, emezha, da baea d'eoc'h evit ar park ar priz a dal ha neuze, mez neuze ebken, me a lakai Sara ennha. » « Aotrou, eme Ephron, an douar-ze a dal pevar-c'hant sikl arc'hant (vardro 700 lur e Frans.) Mez eur vech c'hoaz, ne dal ket ar boan komz euz arc'hant; anterrit ho c'hini maro. »

Abraham n'oa ket eb gouzoud petra da zonjal euz al langaj faoz-se. Ober a reaskounta dezha deoc'h-

tu, dirak an holl, ar pevar-c'hant sikl a c'houlenne. Evel-se park Ephron, kavargn Macpelah hag ar guez a ioa plantet en dachen-ze a deuz da veza tra Abraham, ervez ar marc'had hag ar baeamant great dirak bugale Heth ha kalz tud all euz ar c'harter.

Er c'havargn-ze, dirak Mambre, e lakeas ar patriarch santel, korv Sara, da c'hortoz ma teuo he unan, d'he dro, da repoze en he c'hichen.

Tost da zaou-ugent vloaz e vevas c'hoaz goude-ze. Kalz treveill en doa bet en he vuez : mez mervel a reas e peoc'h.

Araok kimmiada diouz ar bed-ma, hen devoute ar joa da velet he lignez skignet dre an holl broiou tro-var-dro. Ismaël, bugel an dezert, hen doa daouzek map hag a ioa peb hini anezho epenn eur bobl. Roet o devoa ho hano d'ar c'heriou ha d'ar c'hastellou a zavent, adalek Hevile, var ster an Euphrat bete Sur, a zo e tu ster an Nil. Goude maro Sara Abraham, a zimezas da Zethura hag houma a roas dezha c'huoc'h map all. Unan anezho a ioa he hano Madian hag a oue tad ar Madianited. Eun argoulou pinvidik a roas da bep hini anezho hag ho c'hass a reas da zimezi e tu ar Sao-heol. Hogen Doue a reas dezha gortoz epad ugent vloaz heritour ar bromessa. Rebeka ive a jomme dizher evel ma zoa bet Sara. Kaer he doa pedi an Doue hen devoa he zennet euz a vro Kanaan evit beza pried da Isaac, kaer hen devoa Isaac he unan pedi hag aspedi, Doue a vije bet lavaret bouzar. Ar patriarch koz Abraham a lavare dezha kaout bepred fizians, na morse fall-galouni. Setu perak Isaac a bede muioc'h-mui. Abalafin, an holl-galloudek her selaouas

hag a roas dezha eur c'houblad : Esaü ha Jacob.

Adalek neuze Abraham ne zonje mui nemed kimmiada diouz ar bed-ma ha lavaret dezha : kenavo. Azezet dindan toen ledan derven Mambre, e sonje en he spered en trubuillou hen devoa bet var an douar adalek an deiz m'hen doa kuiteat Ur-Kasdin bete ma zoa diouezet e Bersabee. E douk ar c'hant vloaz-se hen doa tremenet dre Haran. Eno, Thare, he dad, a ioa bet diskenet er bez. E Sichem oa bet hag e Bethel. Ama Doue hen devoa diskuezet dezha traou burzuduz. Sonjal a ra en Ejipt hag en Hebron, el leac'h m'oa maro Sara.

E peb leac'h hen devoa bet daelou da skuilla : mez e peb leac'h ive, Jehovah oue trugarezuz evintha abalamour ma z'oa ker santel. Brema he c'helle mervel laouen abalamour m'hen doa douget var he zivrec'h an hini a dlle beza ar chichen euz ar rummad-tud dibabet gat Doue evit lakaat er bed an Hini a vije bennoz an holl broiou euz an douar.

Ar zont-se a laouenneas he vlaveziou diveza. Deuet d'an oad a bemzek-vloaz hag eiz-ugent, e vankas dezha he nerz hag e veljot sklear edo he ene e vont da nijal varzu eneou he dud koz. Isaac hag Ismaël a ioa en dro dezha, pa varvas. Goude ar c'haon hag ar pedennou e toukchont he relegou bete kavargn Macpelah, hen doa prenet digat Ephron, an Ethean. Eno ema e repoze pelerin Jehovah, an hini a zo bet hanvet gat ar boblou euz ar sao-heol hag euz ar c'huz-heol : Tad an dud a feiz ha mignoun an Aotrou Doue.





TAOLEN.

	PAJEN.
I. Ger Doue	5
II. Ar perc'hirin	18
III. En Ejipt.	14
IV. Roue Elam	20
V. Doue en hem ziskuez da Abraham	26
VI. Ar mab heritour	30
VII. An tri eal	35
VIII. Sodom dismantret	40
IX. Agar hag Ismaël	45
X. Ar Sakrifis	49
XI. Eliezer ha Rebeka	53
XII. Maro Abraham	60

